

AR GEMENEREZED

(Les Couturières)

War eun ton anavezet

Chilaouet holl ha chilaouet
Eur zouenik a m'euz savet,

Eur zou a ganimp war eun dro
Z'war brava merc'hed hor bro.

Euz hor bro ar c'hoanta merc'hed
Sur a zo Kemenerzed.

Gant daoulagad glaz en ho feun,
Ea ho beg, dentou kaër ha g'wenn.

Gant diou vougenn ru grenn ho flour,
Int lak en hor beg ton'an dour.

Vel eur vauden evned sponset,
Die al lanneier vent gwelet.

Et veut gwelet ha mintin mad,
War ar mez font da labourat.

.....
C'hui gles du ze tond euz ar ger
Eur vouez a gan joaüz ha skler ?

Er zouler zo eur plac'hik flour,
He feun pleget war he labour ;

Ha c'hi ne wel ket, en dro d'hi
An dud o vont e ribl en ti.

Paz eur potr iaouank fichet mad
A neuze vew he zaoulagad.

Mez na zonz kel d'eur labourer
Staget'tao euz lost he haler ;

Mez a dra zur zaill he c'halon
Vit eur martolod, he vignon,

Hag a wel alao, e hunvre,
Epad an noz, epad an de...

En eun tenn c'hoarz, euruz, laouen,
Ar plac'h a ra eur iouc'haden.

Ha d'ar vanden, gant kalz a joa,
He c'harantez dizol a ra :

Mari ha Soazik zo jalouz ;
Tic ar gomerezed a zo trouz.

Ha klevet m'euz (marse ma gaou ?)
Flemmant ho reor gant ho nadaou.

Mez atavik veint humeur vad
Hag en tammick leodek mar fat ?

A wechou, me gred, an teodaou,
la fonnusoc'h'vit an nadaou ;

Gouiet a ran er pezh a baz :
Ped logoden a dap ar c'haz,
Ped plac'h iaouank a c'hoanta d'oc'h,
Klevet a ran pep son ar c'hloc'h.

Mar karan, giz-se, c'huitellad,
Merc'hech fur maint, ha poset mad.

En Iliz, d'ar zul, o gweler,
Mintin mad, laret ho rozer.

Er pardonniaou, o gweler stank
E'leac'h a zo paotred iaouanck.

.....
Ha pa vo ma zonz da zime
Da glask ar plac'h giz-se me iei.
Me choajo eur vraoc'hik mestrez
Eur vestrezik Kemenered.

Clohars Carnoët.

LÉON AR MÉVEN.